

TEIR GWERZ SANTEL

AR GWIR VREIZIZ

Advoullet evid an naontekved gwech

Ha Gwerz en enor d'al Labourerien

sant **TALDIR**

I GWENNEK

ar pez

I SKOED

ar c'hant

AR BOBL, gazeten neventiou ha kelachou Breiz :
eur gwennek ar rummen : 14 real ar goumanant bloaz.

AR VRO, kelaouen bep miz, Soniou ha Gwerziou :
6 real ar bloaz.



BRO GOZ MA ZADOU


(Kan broadus an diou Vreiz)



Ni Brei-ziz a ga-lon, karomp hon gwir



Vrô! Bru-det eo an Ar-vor dre ar bed tro-



dro. Dispont 'kreiz ar bre-zel, hon ta-dou ken



mad. A skuil-laz e-vi-ti o gwad.



DISKAN : O Breiz! va bro, me gar va



Bro. Tra ma vo-mor 'vel mur 'n he



zro, Ra ve-zo di-ga-bestr va Bro!

Ni Breiziz a galon, karomp hon gwir Vro!
Brudet eo an Arvor dre ar bed tro dro.
Dispont 'kreiz ar brezel, hon tadou ken mad,
A skuillaz evit-hi o gwad.

(DISKAN.)

O Breiz, ma bro, me gar ma Bro.
Tra ma vo mor 'vel mur 'n he zro
Ra vezo digabestr ma bro!

Breiz, douar ar Sent koz, douar ar Varzed,
N'euz bro all a garan kemend 'barz ar bed.
Peb menez, peb traonien d'am c'halon zo kaër;
Enné kousk meur a Vreizad ter!

(DISKAN.)

Ar Vretoned a zo tud kaled ha krenv;
N'euz pobl ken kalonek a zindan an nenv,
Gwerz trist, son dudius a ziwan eno,
O! Pegen kaër ec'h out ma Bro!

(DISKAN.)

Mar deo bet trec'het Breiz er brezelioù braz,
He iez zo hepred ken beo ha biskoaz.
He c'halon birvidik a lamm c'hoaz 'n he c'kreiz,
Dihunet out brema ma Breiz!


(DISKAN.)

SAO BREIZ-IZEL

(Kan-bale ar Vretoned)



Sao, Breiz-I-zel, d'an nec'h da va-nie-




lou Ra-sied gant goad hon c'henta-



dou! Stagomp d'hor gouriz hor c'hleze-ier



hir, Ra-vo-hon di-vrec'h krenv 'vel dir!



La-varomp holl euz a bouez hor penn:



Breiz da vir-vi-ken! Breiz da vir-vi-ken!

Sao Breiz-Izel, d'an nec'h da vannielou
Ruziet gant gwad hon c'hentadou!
Stagomp d'hon gouriz ar c'hezeier hir,
Ra vo hon divrec'h krenv vel dir!
Lavaromp holl euz a bouez hon penn:
AN HOLL: Breiz da virviken! Breiz da virviken!

Dihun Breiz-Vihan, ma mam binniget,
Rag an deiz a zo digouezet;
Hon galv a ziston war benn ar mene
Hag ac'h entana peb ene,
Breiziz deuz peb parrez a ziskenn,

AN HOLL : Breiz da virviken ! Breiz da virviken !

O iouc'hadennoù a red dreuz d'an êr
Beteg goueled al lanneier;
Ar mammou a zigas o bugale
Da gaout o zadou en arme.

N'euz 'med eur iouc'h, en Breiz penn-da-benn,
AN HOLL : Breiz da virviken ! Breiz da virviken !

Mene-Bro ro dorn da Vene-Kragou !
Tridal a ra o c'hribennou.
Anê o-hunan o reier a ruill,
War an enebour kouezont puill,
Gwagen ar mor a lâr d'ar wagen :

AN HOLL : Breiz da virviken ! Breiz da virviken !

Beteg ar gwelec'hiou ar re bella
Ar c'horn a vrezel a vouda,
Hag a lâr d'an holl boblou euz ar bed
E ma beo gouenn ar Vretoned.
An avel mor iud en eur dremenn :

AN HOLL : Breiz da virviken ! Breiz da virviken !

Kalonou an holl a zo entanet
Hag an divrec'h a zo nerzet.
Paotred Breiz-Vihan ha Breiziz-Tramor
A skloum o daouarn dreist ar mor;
Holl C'halloudek, ro 'n Trec'h d'az mibien :

AN HOLL : Breiz da virviken ! Breiz da virviken !

Dalc'h sonj, o Breiz-Izel !

(Kanaouen an amzer dremenet)



Dalc'h sonj o Breiz-Izel deuz




an am-zer Rog ma oaz gwerzet ha trec'het Pa



c'halle da vi-bien ker-zet se-der, Soun o



fenn, di-nec'h o spe-red.



Dalc'h sonj, o Breiz-Izel, deuz ar re-goz
O deuz luskellet da gavel !
E peb traonien ha war griben peb roz
E klevi o mouez en avel.
A aveliou a c'houez war da blenennou
A zoug eneu ar Vretoned
Pere lavar d'id bemdez en o c'hlemmou :
Dalc'h sonj euz da amzer dremenet !

Dalc'h sonj, o Breiz-Izel, deuz ar Morvan ;
Deuz Nominoë, mestr dispar ;
Deuz da Rouane, deuz ar prinz Alan ;
Deuz ar Sent, deuz gret da zouar ;
Deuz an Duked vad a c'houarnaz ar vro
Ha deuz hano an dud-a-vrezel ;
Deuz merdeidi ha Korserien Sant-Malo
A zougaz dre ar bed da vanniel !

Dalc'h sonj o Breiz-Izel, deuz ar Varzed
A ganaz da iez dudius !
Bennoz d'ezo, da iez zo beo bepred,
Beo ar Brezonek enorus !
Dalc'homp sonj ! Dalc'homp da viken an envor
Deuz gloariou dispar hon c'hentadou,
Ha n'euz forz pegeid e padfe Bro Arvor
Na zilezomp biken o roudou !

ENOR DA LABOURERIEH BREIZ

Ton : E Kastell-Pol ez oun bet ganet.

Arru eo ar c'houlz braz da zével
Hon bro en he enor gwech-all
Ha da renti kontre Breiz-Izel
Ken evurus hag ar re-all,
Ha vid an dra-ze
Holl dud ar vro-mê
Eun taol bout d'ar chas gall a zo deut er c'hontrê
Var zao paotred ar meaziou
Ha paotred ar c'heariou.


Stardomp an eil daouarn egile
Hag ankoueomp an droug bet gret ;
Pardonomp ar gaou, ar fallente
Bezomp brema breudeur parfet.
Hag hon c'harantez
O kreski bemdez
A rei da dud Breiz nerz ha reiz a-nevez
En em garomp Bretoned
Bourc'hizien, paizanted.

Dre ar garantez 'rer burzudou
Hag ar viktor a c'honeer,
Dre ar gasoni, an injuriou,
En em grigner, en em goller.
Karomp Arvorik
Hag ar Republik,


Hag an divrec'h a zo nerzet.
 Paotred Breiz-Vihan ha Breiziz-Tramor
 A skloum o daouarn dreist ar mor;
 Holl C'halloudek, ro 'n Trec'h d'az mibien :
 AN HOLL : Breiz da virviken ! Breiz da virviken !

Dalc'h sonj, o Breiz-Izel !

(Kanaouen an amzer dremenet)




Dalc'h sonj o Breiz - I - zel deuz



an am - zer Rog ma oaz gwerzet ha trec'het Pa




c'halle da vi-bien ker - zet se - der, Soun o




fenn, di - nec'h o spe - red.



Rog ma oaz bet tao - let heb



di-fenn ha paour, Dindan seu-liou poun-ner an



es - tren Ha sta - get da vi - ken deuz



e garronz aour, deuz da dreid ken tener eur chaden !

Dalc'h sonj, o Breiz-Izel, deuz an amzer
 Rog ma oaz gwerzet ha trec'het,
 Pa c'halle da vibien kerzet seder,
 Sonn o fenn, dinec'h o spered.
 Rog ma oaz bet taolet, hep difenn ha paour,
 Dindan seuliou pounner an estren
 Ha staget da viken deuz e garronz aour,
 Deuz da dreid ken tener eur chaden !

ENOR DA LABOURERIEIEN BREIZ

Ton : E Kastell-Pol ez oun bet ganet.

Arru eo ar c'houlz braz da zével
 Hon bro en he enor gwech-all
 Ha da renti kontre Breiz Izel
 Ken evurus hag ar re-all,
 Ha vid an dra-ze
 Holl dud ar vro-mê
 Eun taol bout d'ar chas gall a zo deut er c'hontrê
 Var zao paotred ar meaziou
 Ha paotred ar c'hearitou.

Stardomp an eil daouarn egile
 Hag ankoueomp an droug bet gret ;
 Pardonomp ar gaou, ar fallente
 Bezomp brema breudeur parfet.
 Hag hon c'harantez
 O kreski bemdez
 A rei da dud Breiz nerz ha reiz a-nevez
 En em garomp Bretoned
 Bourc'hizien, paizanted.

Dre ar garantez 'rer burzudou
 Hag ar viktor a c'honeer,
 Dre ar gasoni, an injuriou,
 En em grigner, en em goller.
 Karomp Arvorik
 Hag ar Republik,
 Lezomp e greden gant peb den da bratik,
 Sikouromp an dud izel
 Ma c'hellint 'n em sevel.

Bebet al Labourerien gwirion,
 Ar re a enor o c'hontre !
 Ar vicherourien eon o c'halon
 Hag a zouj lezennou Doue !
 Bevet ar frankiz,
 Ar peoc'h, ar justis,
 Ha peb tra c'hei mad, heb gwad, na polis,
 Ia, touomp bepred difenn
 Ar gwir Labourerien.

Goulennomp ma vo ar peoc'h o ren
 Etre kement bro zo er bed
 Evid ma c'hallo skiant an den
 Mond var greski, heb harz a-bed.
 Ha miromp ato
 E barz en hon bro
 He c'hiziou karet ha spered hon zadou,
 Neuze lec'h vo daou Vreton
 Na vo 'med eur Galon.

Tous droits de traduction et reproduction réservés.